



Eul lodennig eus ar brosesion e Bleun-Brug Gwened.

PHOTO JOS LE DOARÉ

Bleun-Brug

Niv. 73 (Miziek-Mensuel)
Koumanant-Abonnement : 500 Fr.

GWENGOLO 1954

KLEVIT 'TA !! ha paet eo ganeoc'h ho koumanant 1954 ?

Eun tammig bolontez vat, mar plij, ha pep hini en em gavo eürus : c'houi da veza paet ho tle, ha ni da c'hellout mont war-raok. — Koumanant ordinal 500 lur — a enor : 600 l. — madoberour : 1.000 l. — V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist. C. C. P. 544.22 Nantes.

TAOLENN

Prezegenn hon Tad Santel d'ar Vretoned	1
Santez Vaodez, gant Y.-V. Perrot	2
Bleun-Brug Pleuvihan	6
Bleun-Brug Lokournan-Leon	9
Bleun-Brug Gwened	12
Priz kenta ar prezeg e Gwened	16
Kenstrivadegou Bleun-Brug Gwened	16
Lazou-kana ha strolladoù all	19
Le concours de chorales, par P. Le Flem	20
Korñ al liziri	21
Keleier	25
Me zo ganet e-kreiz ar mor	26

War bez an Tad

Eun hañvez diès bras en deus bet ar Bleun-Brug. A-berz an amzer fall dreist-holl hon eus bet diêzamañchou spontus war hon hent : Glao bras e Pleuvihan eus 11 eur da ziv eur ; glao bras e Lokournan e-doug an deiz penn-da-benn ; glao e Gwened, penn-da-benn ar sadorn. Daoust da-se n'hon eus ket lec'h da fallgaloni, rak devez ar sul a zo bet dispar.

En eur ziskregi diouz ar bloaz tremenet, hag hor sellou o para war ar bloaz a zeu, eo bet fellet ganeomp mont da belerina da Itron Varia Koatkeo ha da bedi war bez an Aotrou Perrot hon Tad.

Dirak ar bez bleuniet kaer, hag ar groaz keltiek a sav a-us d'ezañ, evel kroaz eur soudard war e dachenn emgann, nag eo c'houek ha frouezus pedi ha prederia. Pedi an hini en deus diskouezet d'eomp an hent goude beza toullet e-unan, an ervenn genta dre greiz ar park, eün evel eun tenn. Prederia el lec'h didrous-se, evel eur manac'h e-kreiz sioulder e vanati.

Koatkeo, neizig glas e-kreiz ar gouezeri a zo eul lec'h beo, ma verv ennan kalon ar Bleun-Brug. Mont a raimp di alies evit mirout na varvfe en hor c'halon goulouenn venniget Feiz ha Breiz.

F.C.B. HA BLEUN-BRUG. — Evit ar re n'ouzont ket pe ne fell ket d'ezo gouzout, e lavaromp, eur wech c'hoaz, n'en deus kef ar Bleun-Brug, na kef ar gelaouenn bet gweneg ebet morse digant an F.C.B. — Kement hon eus resevet a oa **EVIT AR BREZONEG ER SKOL**, hervez menoz an F.C.B. Levriou-skol hon eus da embann ; prest eo an dornskridou.

Golo « Bleun-Brug » diweza, niv. 72. a oa warnañ skeudenn kalvar parrez Pleuvihan.

133685



Evit ar wech kenta abaoe m'eman Breiz en he sav an Tad Santel ar Pab a gomz d'ar Vretoned e brezoneg

Deiz pardon bras Santez Anna Wened, Breiz a-bez, a zo bet kon-sakret d'ar Werc'hez, gant an Aotrou Kardinale Roques, Arc'heskob Roazon.

Araok ar gonsakrasion-se, pelerined Santez Anna, o deus bet ar blijadur da glevet hon Tad Santel ar Pab Pi XII, o komz d'ezo war eün dre radio, da genta e galleg, hag evit échu, e fellas d'ezañ lavaret eun nebeudig komzou e brezoneg.

Eun nevezenti eo houmañ hag he deus evidomp eun dalvoudegezh vras ; eul levenez dispar ivez evit ar re holl a labour da zerc'hel beo ar brezoneg e-mesk ar Vretoned. Eur gentel eo c'hoaz evit meur a hini etouez ar veleien ha ne fell d'ezo mui implija yez hor Sent koz da brezeg an Aviel. Petra 'vo ar brezoneg, en deiz ma vo serret outañ an holl gadoriou prezeg ? Ha n'eo ket aze teurel dismegans war hor yez, eur yez hag he deus skignet kelennadurezh ar feiz e-doug kantvejou ha kantvejou ?

Kemennadurez hon Tad Santel ar Pab d'ar Vretoned

« Va bugale garet a Vreiz, pelerined Santez Anna Wened, d'ar mare m'emañ an Aotrou doujet meurbet Kardinal Arc'heskob Roazon o vont da lenn ar bedenn ho konsakro da galon dinamm Mari, c'houi, ho familhou, ho tud klañv, ho skoliou, ho pareziou, e fell, da dad an holl gristenien beza war evez ouz an oberenn vras emao'h o vont d'ober.

« Dont a ra da rei d'eoc'h kalon ha d'ho penniga. Mar deo aotreet d'eomp, e lavarimp d'eoc'h ar c'homzou a zisklerie Pi X d'ar C'hardinal Laboure e 1906 : « E-kreiz ar brezel a gasoni a reer d'ar Feiz kristen » diganeoc'h-c'houi dreist-holl, eo e c'hortozomp al lodenn wella eus hon levenez.

« Breiz, ni 'oar ervât, a zo bet dalc'h mat douar santel an Itron Varia, hag evel m'eo bet e fell d'ezi chom. Ar merkou eus ho karantez d'ar Werc'hez a zo diniver. Pet ha pet iliz en hoc'h eskoptiou a zo dindan he ano santel ; pet ha pet Gwerc'hez en ho pro, bet kurunet gant an Iliz, a reseo diganeoc'h bemdez testeni doujus ho pedennou ! Pet ha pet eus ho pugale a zoug abaoe o badeziant ano santel ar Werc'hez Vari ! A ! dougit holl, en ho kalon, ano benniget Mamm Doue. Enorit an ano-se dre ho tevosion ; enorit-hen dreist-holl dre ho puhez.

« Ra vo, ar gonsekrasion vras a rit hirio, eur voger greñv ho tifenno diouz an tentasionou, eun abeg a fizians er bedenn, eun nerz bepred brasoc'h, da stourm bemdez evit servich Doue. An neb a zo en em ouestlet da Vari a deu da veza he zra en eun doare ispisial. Dont a ra da veza evel eur chapel m'emañ enni ar Werc'hez o chom. Skeudenn ar Werc'hez a ra d'ezañ stlapa dioutañ an holl soñjou fall. Karantez ar Werc'hez a ro d'ezañ kalon da ober traou bras, da drec'hi mez hag emgarantez, da servicha ha da senti gant pasianted, e sell o para warni. En em staga 'ra ouz ar burentez, an izelegez, karantez an nesa, ma skede ganto ene glan ar Werc'hez Vari. Kasoni en deus ouz ar pec'hed ; brezel a ra d'ezañ, ennañ e-unan, eus e holl nerz.

« Pa wel ar Werc'hez Dinamm o flastra dindan he zroad an naer milliget, pa wel Mamm Doue o sevel etre he divrec'h he Mab Jezuz, ne c'hell mui e volentez digemer an droug, met er c'hontrol, lorc'h a vez ennañ da veza da Jezuz ha da Vari, ha gouzout a ra ivez e c'houlenn Mari digantañ plega da Jezuz e kement tra a c'hourc'hemenn hag a c'hoanta.

« En em lakit eta gant fizians dindan ar vantell a zigor bras gant he divrec'h a vamm evit digemer he holl vugale. Ra vo bodet dindan he gwarez, holl vugale Vreiz, ha ra vezint en he c'heñver bepred gwir vugale.

« En hoc'h istor e vez kavet forz pegement a skoueriou kaer a zevosion d'ar Werc'hez. Ne lavarimp d'eoc'h nemet unan, an hini kaera moarvat, hini Sant Loeiz-Vari Grignon a Vontfort, hon eus bet ar blijadur da lakaat war an Aoteriou d'an 20 a viz Gouere 1947.

« En eur zigemer, en deiz warlerc'h, ar belerined deuet da Rom eus Breiz, eus ar Vandee hag eus ar Poitou, e lavaremp d'ezo : « An holl sent, a dra-sur, a zo bet servicherien vras d'ar Werc'hez, hag holl o deus renet daveti an eneou ; ar sant-mañ, avât, a zo unan eus ar re o deus labouret gant ar muia tan hag ar muia frouez, evit he lakaat da veza karet ha servichet.

« Hirio e fell d'in lavaret d'ar re holl a garfe ober eus o c'honsekrasion da Galon Dinamm Mari, eun oberenn veur ha padus : evel Sant Loeiz a Vontfort hag holl Sent Breiz, grit ma vo ar Werc'hez Vari muio'h karet ha muio'h servichet.

« Kement-se a c'houlenn diganeoc'h, araok pep tra, seveni hoc'h unan vertuziou ar Werc'hez : glanded he c'halon dinamm, an doujañs Doue hag ar spered a bedenn ma komz anezañ an Aviel pa lavar etre diou wech (Lukas, 2, 19-2, 51) e talc'he en he c'halon an eñvor eus grasou Doue hag oberou ar Mabig Jezuz, karantez Doue, izelek, entanet, laouen, a darz er « Magnificat », karantez evit ar re all ivez, evit an holl re all, evit he c'herent, he mignoned, an holl dud ; ar garantez dispar-se a ra d'ezi nijal war zikour he c'heniterv Elizabet, pa glev lavaret edo o vont da veza mamm, a ra d'ezi c'hoaz diboania tud nevez kana, ar gwin o warnes mankout ganto deiz o eured ; ar garantez-se erfin, hag a reas d'ezi beza unanet ken doun gant poaniou he mab evit silvidigez ar bed.

« Ya, ar Werc'hez hag a zo bet ken izelek he stad, hag a zo ken nebeut ano anezi en Aviel, hag a zo bet ken kuzet en he buhez, he deus gwelet an Aotrou Doue o seveni enni an traou brasa, hag hi bepred ken dilorc'h, o estlamm ! Ha setu perak e chom da veza skouer an holl gristenien. Gant Hor Salver e-unan, eo chomet kuzet e Nazaret, unanet gantañ en douster hag en humilite, oc'h ober bemdez deveriou he stad er basianted hag er bedenn. Ne anavezer burzud ebet graet ganti, oberenn dreist ordinal ebet, met karet he deus an Aotrou Doue, a greiz he c'halon, a greiz he ene ha gant he holl nerz. Aze emañ ar gourc'hemenn kenta. Ha karet he deus an nesa evel dor-an-unan. N'eus gourc'hemenn ebet brasoc'h eget ar re-se.

« Evelato, an dud fidel, o deus evit ar Werc'hez eun devosion ispisial, a fell d'ezo alies lakaat o buhez penn-da-benn d'he servicha, hag en em glevet gant re all evit skigna an devosiñ-se. Abaoe meur a gantved e kaver en Iliz breuriezioù dindan gwarez ar Werc'hez hag o deus sikouret e-leiz a eneou d'en em santlaot, setu perak eo bet meulet alies ar breuriezioù-se, ganimp hon unan hag gant ar Pabed all bet en hon-raok.

« Fellout a ra d'eomp komz, dreist holl, eus an emgleviou-se gouestlet d'ar Werc'hez hag hon eus anvet an ober katolik hervez spered an Itron Varia, ha diazezet ganeomp war hon lizer-meur « **Bis Saeculari** » bet skrivet d'ar 27 a viz Gwengolo 1948.

« Klevet hon eus gant laouenedigez, o deus, e Breiz, an emgleviou-se, izili oberiant. Heti a reomp e vefe ar vro-se, a anvomp bro ar Werc'hez, eun douar frouezus a ziwano ennañ e-leiz a eneou santel ha gredus. Ar pezh a reont er broiou pella hag er broiou a bep seurt, perak

n'her grafent ket er Vreiz karet-se hag a skedas warni kement ha ken alies-feiz nevezet he zadou koz.

« Souezet e vefec'h, neketa, va bugale garet a Vreiz, ma ne lavar-femp ket d'eoc'h hirio amañ e Santez-Anna-Wened ken doujet ganeoc'h, eur gerig eus an hini a anvit gant gwirionez, ho Mamm vat.

« Karit a greiz kalon, ho Mamm vat Santez Anna. Kendalc'hit da lakaat ho tiegeziou dindan he skoazell. En eur lakaat Mari er bed, he deus roet d'an denelez ar gaera eus ar grouadurien, ar santela eus ar merc'hed, Mamm Doue. Ha n'eo ket awalc'h kement-se evit m'ho pefe eviti ar vrasa doujañs hag ar vrasa karantez ?

« En eur c'houlenn, eta, skoazell Santez Anna hag an Itron Varia, e c'halvomp warnoc'h holl, war ho familhou, ho skoliou, ho parrezioù, hoc'h eskoption, war Vreiz a-bez, grasou puilha an Aotrou Doue, hag eus a greiz hor c'halon e roomp d'eoc'h hor bennoñz a dad.

« Ra vo meulet kalon glan Mari ! Ra vo meulet Santez Anna, Patronez vat ar Vretoned. » (1)

Pi XII, Pab.

(1) Ar gerioù diweza-mañ a zo bet lavaret e brezoneg gant hon Tad Santel ar Pab.



SANT VAODEZ

Bleun Brug Pleuvihan a zo bet grêt en enor da sant Vaodez, abostol bras ar feiz e Bro-Dreger. Setu amañ e vuhez tennet eus « Buhez ar Sent » an aotrou Perrot.

Maodez, ginidik eus an Iwerzon, a yoa, war a leverer, mab da eur roue bihan eus ar vro-se. Diskenn a reas e Breiz-Izel ha prezeg a reas enni Jezuz-Krist en eun doare helavar meurbet. Poblou diniver a zirede d'e selaou.

Goude beza bet e Koz-Yeodet o welet sant Tugdual, hag e Landreger o welet sant Ruellin, ez eas da chom war lez ar mor, er c'horn pella eus a barrez-Pleubihan, etre ar Yeodi hag an Treo, el lec'h a anver bremañ Lanvaodez.

Ar vrud eus e santelez a reas da e-leiz a dud dont d'e gaout. Parea 'reus tud sonnet o izili, tud dall, tud bouzar, tud, perc'hennet gant an droug-spered. Gant yec'hed ar c'horf, e roe d'ezo ivez yec'hed an ens.

Evit pellaat diouz trouz kasaus ar bed, a vire outañ d'en em rei d'an Aotrou Doue evel m'en doa c'hoant, ec'h en dennas en eun enezenn c'houez, eul leo bennak diouz an douar bras. Den ebet n'en devoa gellet chom en enezenn-se c'hoaz, kement a amprevaned iouz a oa e-barz. Maodez a reas ar rîñs warnezo, hag a savas eun tammig tibidi gant eur peniti e-kichen.

Kaer en devoa bet tec'het diouz an dud, c'houez vat e santelez a reas d'ar bobl kavout e roudou, ha meur a hini a yeas da vevañ en e ser, da zeski gantañ hent ar Baradoz.

Sevel a rejont o fenetioù tro-war-dro d'e hini, disparti an eil diouz egile. E-kichen e savjont ivez eun iliz, ha pa voe peure'hraet, an abad santel a bedas holl eskibien Breiz da zont da ober ar gouel eus he dedi.

Tra souezus, peneti Sant Vaodez, daoust d'an amzer fall ha d'ar c'hantvejou niverus a zo tremenet a-zioc'h e dal, a zo c'hoaz en e-sav. Anvet eo dre ar vro, « Forn Vaodez » abalamour m'eo savet war gela'h, evel eur forn. C'houez'h metr uhelder a c'hell kaout, ha daouzek derez a zo da bignat enni.

Eno eo e tremenas Maodez ar rest eus e vuhez oc'h en em santelaat e-unan hag o santelaat muia ma c'helle kement hini a deue d'hen darempredi.

O veza kouezet klañv, e c'houez'h emennas start d'e venec'h, dere'hel da garet mat an Aotrou Doue, hag goude beza bet e sakramañchou, e tremenas e peoc'h, e zaoulagad o para war Groaz Hor Salver.

Sebeliet e voe e gorf en iliz an enezenn ha Doue en deus embannet abaoe e c'hloar dre galz a virakloù.

Tri-ugent iliz pe chapel a zo bet savet e Breiz-Izel en enor da Sant Vaodez. Goude Sant Erwan, n'eus ket eur sant hag a vefe bet pedet muioc'h gant ar Vretoned.



Maodez servicher ar sklêrijenn evel ar Bleun-Brug

Eun ano koz-koz eo « MAODEZ » douget hirio c'hoaz e meur a gorn e Breiz-Izel. Eun ano kaer eo ivez, rak hervez an dud desket en deus an dalvoudegez-mañ : Mao = Mevel ; dez, deiz = sklêrijenn. Mevel ar sklêrijenn, servicher ar sklêrijenn, setu ster an ano « Maodez ». Abalamour da-se, moarvat eo e ra an Aotrou Perrot, war-lerc'h buhez ar sant-mañ, eur gentel war ar « sklêrijenn ».

« Maodez a zo bet, e gwirionez, a lavar d'eomp « Barr-Heol », kelaouenn Bleun-Brug Landreger, servicher an hini en deus lavaret : « Me eo sklêrijenn ar Bed ». Maodez, servicher ar Feiz, evel hon holl sent koz... Servicher Doue, servicher ar wirionez hag al lealded, evel m'eo ar Bleun-Brug : Servicher ar wirionez, servicher Doue da genta.

« Maodez a zo bet ivez servicher e genvroiz. Bez' ez eo unan eus ar re-se, a sikouras sevel Breiz. Gant kig ha gwad e oa grêt, ha setu perak, ar garantez tomm a zouge d'e Zoue, hen stage ivez ouz an douar a oa war e dro hag ouz an dud a veve war e dro. Bez' e voe unan eus ar re-se a garas Breiz, hag a labouras evit santelaat Breiz hag evit gwellaat buhez ar Vretoned... Bez' e voe servicher ar sklêrijenn evit tud e vro... Rak-se e oa mat e lakaat da baeron evit Bleun-Brug Pleuvihan, rak ar Bleun-Brug ivez a zo difenner ar wirionez hag ar sklêrijenn evit ar Vretoned.

Ar Bleun-Brug n'en deus ket aon rak ar wirionez, ha setu perak ec'h embann a vouez uhel e eil ger-stur : Breiz. Petra ' vo gounezet, eur wech ma vo aet Breiz hag he spered diwar an douar ? Ret eo kredi hon eus-ni Breiziz eun dra bennak da ober er bed, eun dra bennak ha ne vo grêt gant den all ebet hag a vo kollet da viken ma tigouez da Vreiz mervel... Ar Bleun-Brug a zo gwizlennet don e douar Breiz hag a labour da virout en he c'haer holl beadra kristen ha breizat ar vro-mañ.

« Arabat kredi ez eo troet ar Bleun-Brug war-du an amzer dremenet. N'eo ket grêt evit mirout traou kaer, met fellout a ra d'ezañ, evel Maodez, beza eur sklêrijenn evit amzer da zont ar Vretoned. Fellout a ra d'ezañ en em sila e pep tachenn eus buhez ar Vretoned : labour-douar, artizanerezh, micherou, uzinou, kenwerzh, skoliou, martoloded, pesketerien, an holl dud a var a zo ivez e dalc'h ar Bleun-Brug. Marteze eo ar re-mañ a zo muioc'h e riskl da welet o feadra breizat ha kristen, o vont diganto. Ar Bleun-Brug a zo e galon ganto ivez... Hag en deiz ma vo deuet a-bénn ar Bleun-Brug kristen ha breizat, d'en em astenn war holl vuhez ar vro, e vo ar Bleun-Brug, e Breiz, ar beñveg gwella a abostolerezh kristen. Ha Breiz, hec'h unan, eun tour-tan, en iliz katolik, ha servicherezh ar sklêrijenn evel Maodez. »



Sonerien skola] Sant-Joseph Lannuon e Bleun-Brug Pleuvihan.

PHOTO JOS LE DOARÉ

Bleun-Brug Pleuvihan

An aotrou Thos, person Pleuvihan, hag an ao. Gall, e gure, henchet ha sikouret gant an ao. Kadoudal rener Bleun-Brug Treger hag an ao. ar Zant, sekretour, n'o deus espernet nag o amzer nag o foan, evit ma teufe Bleun-Brug Pleuvihan da veza eur c'haer a Vleun-Brug.

Eur marz e oa digouezout e Pleuvihan, d'ar sadorn 29 a viz mae. Goude tremen dindan eur volz a enor evel dor eur c'hastell kreñv, ne weled dre holl nemet garlantez, evel eur volz a-zioc'h ho penn, dreist-holl war ar blasenn dirak an iliz el lec'h ma tlee beza kanet an oferenn-bred.

Ouspenn garlantez, e weled c'hoaz dre holl kinkladuriou a bep seurt : bigi, bretoned ha bretonezed, korollerien, herminigou ha drapoioù Breiz ha me' oar-me.

Ref eo meuli Pleubihaniz ha lavarout emañ ganto ar maout war ar poent-mañ.

Marzus ivez gwelout ar skritelloù brezonek o doa laketa war o ziez da guzat ar re c'halleg.

D'ar zul 30 a viz mae edo ar gouel bras. Diouz ar heure, evel e pep Bleun-Brug, kenstrivadegoù e skol al leanezed.

Renket mat e oa an traoù gant an aotrou Calvez, rener an abadenn. Dek pe daouzek jury, avât, en doa ranket da sevel evit dont a-benn eus ar genstri-verien. Pet a oa anezo ? 300 ? 400 ?... eur bern, a-dra-sur.

Labour vat a oa bet graet, rak gweladennet e oa bet an holl skolioù e-doug ar goañv, ingalet levrioù ha follennou kenstriva.

Da 11 eur e kroge an oferenn-bred war ar blasenn, dirak tour an iliz. Mont a rae ar c'han endro, m'oa eun drugar, gant lazou-kana Gwengamp, Lannuon, Landreger, Perroz, Pleuveur-Gaoter ha Pempoull, eilet gant eun engroez a dud deuet ganto o mouezioù kaera ha kreñva.

Siouaz ! avât, a-vec'h m'edo ar « Gloria » o tregerni, ma teuas eur pil dour ha ret d'an holl mont da glask an disklaio e-barz an iliz. Eno eo e voe kendalc'het gant an oferenn.

An ao. Cöcain, person Plouha a brezegas war sant Vaodez, paeron Bleun-Brug Pleuvihan, hag abostol bras ar vro.

En-dro d'an ao. Brochen, vikel-vras, edo eno holl bersoned ha beleien ar c'hanton hag eun toullad mat a re all, ouz o heul senatourien, deputeed, maered...

Ar glao a badas betek diw eur. E-doug ar pred, e savemp alies hon daoulagad, nec'het-maro, war-zu ar c'hoummoul du, o c'hortoz eur skleraenn.

Dont a reas ar skleraenn, a drugare Doue ! ha ni d'ar park, dre eun hent bouilhennek ha leun a zour.

— Piou an diaoul a sonjemp, a deuo amañ hirio, da vresa kemend-all a vouilhenn.

Dont a reas eur bern tud avât, ha ma veze grosmol ganto o lammat dreist ar pri, hini ne glemmas goude pa zigouezjont er park.

Pebez lec'h dudi ! Pebez liou kaer gant ar mor ! Pebez taolenn dispar ! Netra nemet evit al lec'h e talvez ar boan dont betek eno : mor a gleiz, mor a zehou ha mor dirazoc'h ; reier, enezennou, tourioù-tan. A-rez d'ar mor, eur podium, eur mell bag dre lien a bep tu d'ezañ.

Eno e voe « kan » gant Sant-Jozef Lannuon, Gwengamp, Landreger, Penvenan, Pempoull, Perroz ; « koroll » gant kele'hioù Boulvriag, Rostren, Plouaret, Porz-Gwenn, Pempoull, Louargad, Ploueg-ar-Mor ha Perroz ; ha « son » gant bagadoù Boulvriag, Rostren, Perroz, Lannuon ha Pempoull : plijadur evit an daoulagad, dudi 'vit an diskouarn.

Warlerc'h e voe eur « jeu scénique » savet gant an ao. ar Gall kure Pleuvihan, ha c'hoariet gant Pleuveur, Ploubazlaneg, Ploueg ha Landreger. « Ar Mor, hent ar Sent » setu ano an abadenn-se, a ziskouezas bep eil tro : galv ar mor, buhez ar moraer, kimiad ar besketerien araok mont d'an Island, buhez ar merc'hed er gêr, intañvezed ar mor, hag erfin, dilestradeg ar sent, ebestrel ar vro : Maodez, Botmael, Tudy, Gweltas, Tual, Brieg, Fragan, Briag, Nerin, Samzun, Kireg... Taolennou fromus ha kentelius war al lec'h end-ettin ma touaras an ebestel-se, 1.500 vloaz a zo, pe dost.

Holl barrezioù ar c'hanton a oa deuet gant kroazioù ha bannieloù. Itron Varia Wir-Sikour, ar wech kenta d'ezi da guitaat Gwengamp, a oa deuet ivez.

Da fin ar « jeu scénique » ar brosesion vras a loc'has, da genta dirak ar mor, da c'houde dre an henchou a gas d'ar vourc'h, disec'het a-benn neuze, rak eun heol splann a lugerne bremañ en oabl digatar ha glas-fresk.

Kantik sant Vaodez a dregerne, hini sant Erwan ivez keit ha ma klevet Gwengampiz e kana kantig o Gwerc'hez.

Eur mor a gan e voe bourc'h Pleuvihan evit bennoz ar Sakramant war ar blasenn.

Lorc'h a c'helle beza ennomp o kloza ar gouel kaer-se. Enoret hon doa Doue, enoret ar Werc'hez, enoret sant Vaodez hag hor sent koz. Laouen e c'helle beza Pleubihaniz. N'o doa morse, en o c'hêr, gwelet kaeroc'h gouel. Laketa o doa o foan hag o amzer, a greiz kalon, digollet int bet. Deo gratias !

Goude koan e voe, e sal vras ar skol, eun nozvez laouen kenañ. Rostren a gorollas, Gwengamp a ganas, Stanis Nikol a rimadellas, ha strollad Boulvriag a c'hoarias « Ar Vatez Vihan » pezh-c'hoari farsus Jarl Priel. Diès lavaret en eur skrid, ar blijadur yac'h hon eus bet eno en abardaevrez-se.

Ra vo meulet ha trugarekaet pep hini.

V. S.

Anoïou ar re o deus bet ar prizioù kenta e Bleun-Brug Pleuvihan.

PREZEGEREZ : Pauleta Helard, Tremargat ; Mari-Eva Priel, Plouguiel ; Glaoda Kalvez, Gwengamp.

LENN : Eliane Careres, Pleubihan ; Marta ar Rouz, Plouber ; Anaig ar Pab, Plouber. — Yvon ar Roue, Ploueg-ar-Mor ; Charlez Nicolas, Landreger ; Fransez Bodet, Gwengamp.

KANA : Liliana ar Flemm, Plouber ; Renea Houverou, Tredarzeg ; Anna Kloareg, Tanquedeg. — Guy Konan, Pempoull ; Yann Chafoteg, Bourbriag ; Herve Jeffroy, Pempoull.

DISPLEGA : Annaig Kefelou, Plouber ; Yveta Laouenan, Rospez ; Soaz Briand, Plouber. — Yvon Karo, Pempoull ; Filip Tanguy, Tremargat ; Loeiz Guilcher, Boulvriag.

SKRIVA : Yves Bodiou, Buhulien ; Annaig Jeron, Tremargat ; Nicole ar Bihan, Buhulien.

TRESA : Glaoda Avril, Pontreo ; Yann Jegou, Ploueg ; Guy Jeffroy, Landreger. — Mari-Loeiza Tourbin, Tredarzeg ; Maria-Chantal Hervé, Rospez ; Annaig Petibon, Pleuveur.

Tennet eus prezegenn an aotrou Kadoudal e Bleun-Brug Gwened.

Plijet omp bet o klevet an Ao. Kadoudal, penn-rener Bleun-Brug eskopti Sant-Brieg, o tisplega d'eomp al labour vat graet ganto war dachenn ar skolioù. Setu amañ darn eus e gomzoù :

« Lavaret hon eus kenstrivadegoù ; war al labour-se e felle d'imp pouezañ ar muiañ.

« Gwelet hon eus (an Ao. ar Zant, kure Boulvriag, ha me), adalek deiz kentañ miz Ebrel betek hanter Mae, an holl skolioù kristen, paotred ha merc'hed (lodenn vrezonek an eskopti). 18 skol paotred ha 12 skol merc'hed o doa asantet kemer perz er c'henstrivadegoù.

« En holl skolioù koulz lavaret ec'h oamp bet digemeret mat... Awechou koulskoude e tigoueze d'imp kavout tōliou start. Erruet ec'h oamp eun devez en eur skol renet gant eur vamm briolez ginidik eus al lodenn c'hall eus an eskopti. Ar vamm briolez, he daou zorn en he mancheier, hag he gouel diskennet war he daoulagad, a erruas er sal-digemer, el lec'h ma oamp ouz he gortoz. Ar c'homzou etrezomp a oa bet berr : « N'an eus amañ, emezi, nemet diou leanez hag a c'houfe brezoueg, unan ane a zo keginerez hag eben he deus trawalc'h da ober, kent soursial deus traou e-giz-se ».

« N'on devoa ken netra da ober, nemet tennañ d'ezi hon o'halabousennou, hijañ ar poultr deus hon bouteler, lakat an tan war hon butun, pignal en hon c'harr-tan, jachañ war hon loc'her, pouezañ war ar buanader ha skarzhañ etrezek eur vro tom-moc'h. »... « Gwelet hon eus 105 parrouz ha redet 2000 km. »

✱

Al labour-se a oa bet graet evit Bleun-Brug Boulvriag.

« Labour beleien Pleuvihan a zo bet kalc'haezetoc'h, rak al labour war dachenn ar skolioù a oa bet lodennet. Beleien ha liked o devoa asantet kemer pep hini eun tamm deus al labour. En pep korn-bro, e oa bet daou da nebeutañ evit pleal gant kenstrivadegoù ar skolioù, hag ivez klask tud da zont d'ar gouel ha da zigas gante skeudennou... »

« Al labour ingalet er stumm-se a zogas frouez : 400 a vugale o kenstriva. Kelec'hioù-keltiek nevez laket war-sao : Kallag, Plouaret, Louargat, Plistin, Ploueg-ar-Mor, Pempoull. Bagadou nevez ivez : Perroz, Pempoull, Lanhuon, Boulvriag, Ploueg — ha lazou-kana : Gwengamp, Plounevez-Kintin... »

« War a lavar an holl, Bleun-Brug Pleuvihan a zo bet dispar. Perak ? Sur mat eo dleet d'al labour vras a zo bet graet e-pad ar bloaz tremenet, en hon eskopti. Holl, beleien ha liked, en em gave unanet dre ar gazetenn vihan, savet eur bloaz 'zo : « Barr Heol » hag a deus bep tri miz da entana kalon pep hini, en eur ziskouez al labour graet en amzer drmenet gant ar stourmerien goz : an Aotrou Yann-Vari Perrot hag an Aotrou Lec'hvien, merzerien ar Bleun-Brug. »



Sekretour ar Bleun-Brug o weladenni ar skolioù evit ar brezoneg.
Amañ her gweler e skol Loperch'het.

PHOTO « COURRIER »

Bleun-Brug Lokournan-Leon

Lun ar Pantekost. Bleun-Brug Leon eo a zo o tigeri.

Abaoe n'ouzoun ket pegeit, an ao. Dujardin, pe L. Lok, ma kavit gwelloc'h, a-vec'h ma kave amzer da gousket ha da zebri, gant ar prez a veze warnañ bemdez wardro Bleun-Brug Leon.

— C'houi 'welo, a lavare, Bleun-Brug Lokournan a vo trec'h da hini Plougerne.

Hag e vije bet, marteze, anez ar glao.

— Glao adarre ?

— Ya siouaz ! ha n'eo ket ober an neuz eo m'hel lavar d'eoc'h : Eus ar mintin betek an noz eun dour-bilh evel n'oa ket bet gwelet abaoe bloaz.

En taol-mañ 'vat, a sonjemp, e vo kaset hor stalig da netra.

✱

Daoust da imor fall an amzer, en disklaou, e ti ar Seurezed, ez eas ar c'henstrivadegoù mat kenañ endro.

Leon bourr e oa ar skol. Deuet e oa bugale, paotred, merc'hed dreist-holl eus Lokournan, Lamber, Milizag, Lanrivoare, Brelez, Guiproñvel, Lambaol, Gwitalmeze, Plouzane, Landunvez, Plouarzel, Plabenneg, Porspoder, Sant-Pabu, Plouzeniel, Plougonvelin, ar Folgoat, Lesneven, Gwiseni, Kerlouan, Loperhel,

Bodiliz, Landivizio, Sizun, Kleder, Pouldergat. En holl, 26 parrez, wardro 275 paotrez ha 98 paotr. Job Seite, skoazellet gant Yvon Troal a renkas pep tra eus ar gwella. Paeroniet e oa ar c'henstrivadegou gant an ao. chaloni Falc'hun, a deuas eus Skol-Veur Roazon el lec'h m'eo kelenner, da gemer perz el labour-barn.

E-keit-se, ez ae ivez en-dro ar prezegerez, ar rimadellou hag ar c'han-pobl. Setu anioù ar re a zo bet da genta.

PREZEGEREZ : Mari-Louiza Fily, Gwiseni, ha Yann Roudot, Gwiseni. — **KAN-POBL :** Job Larreur, Plouzane, ha Fransina Hall, Plouzane. — **RIMADELLOU :** Mari Breton, Gwiseni, ha Sezni Abiven, Gwiseni.

LENN : Noëlla Gouil, Pouldergat, hag Yves Moalig, Milizag. — **DISPLEGA :** Monig Loag, Gwiseni ; Jacqueline Creignou, Kerlouan ; Daniela Kere, Ar Folgoat ; Yves Moalig, Milizag ; Guy Briand, Pouldergat, ha Guy Bonizég, Gwiseni.

KANA : Jannet Balkon, Lokournan ; Soazig Joly, Lokournan ; Anna-Maria Barz, Lokournan ; Yves Petton, Lokournan ; Maoris Breton, Lokournan, ha Fransez Bizien, Lokournan.

Aotrou person Lokournan en doa lamet kuit eus an iliz, an holl gadoriou, evit ma vije muioc'h a blas. Keriz Lokournan, ha ne gredent ket kalz er Bleun-Brug, ne welent ket perak. Evit kredi a rankent gwelet.

Gwelet o deus avat, en doa bet rezon an ao. person o lakaat e gadoriou er-mêz daoust ma oa glao bras. Anez da se, neket ar c'hadoriou eo a vije bet glepiet, met an dud.

Leun-kouch e oa an iliz pa grogas an oferenn-bred, kanet gant an ao. chaloni Cadiou, vikel vras, prezeget gant an ao. Menn, person Lannilis.

Kanerien vihan Sant-Stanilas Lokournan, Lazou-kana Landi, Plougerne ha Plouzeniel eo a gasas en-dro ar c'han : eun dudi ! a lavare an dud, en eur vont d'ar gêr dindan ar glao, eo bet an oferenn-bred. Ar Bleun-Brug ne oar ober goap ouz den ebet.

Eun druez e oa ivez, gwelet kemend-all a wiskamanchou kaer dindan kemend-all a c'hlae. Pep hini avat a ouie laouen, kemer an amzer evel m'edo. Petra vije graet ! N'omp ket mestr d'an amzer. Doue a ra mat atao ar pezh a ra. Ma ra droug ar glao d'ar Bleun-Brug, e rae mil vad d'an douarou skarnilet gant ar se'hor. Ha neuze, evel ma lavare an D' Dujardin mat atao da farsal, re vihan e vije bet Lokournan evit ar mor a dud a vije deuet d'ar Bleun-Brug, ma vije bet brao an amzer. Eur waskadennig d'ar yalc'h, a zo mat ivez awechou evit divorñla ha digas d'eomp da soñj n'eus ket nemeur da gonta war madou an douar.

Bourret e oa an holl ostaleriou da vare merenn. Laouenedigez e pep lec'h. Kanaouennou forz pegement, ha dañsou ivez goude ar pred, en dro d'an taolliou.

Ken dereat eo ar yaouankizou-se, ken drant, ma chom souezet ostizien kêr Lokournan. « N'omp ket boazet da welet kemend-all, emezo. Ar Bleun-Brug a zo eun dra gaer. Dipitus eo memes tra e vije ken fall an amzer. »

Er presbital ivez, an ao. Person a oa laouen, gant eun toullad brao a bennou bras en-dro d'ezañ.

« N'eus ket d'ober bilou a lavare ao. Person Lannilis, mat da sevel ar moral, a-benn kreiz an deiz e vo tomm an heol. »

An heol n'en em zispakas ket. Mont a rae ar glao zoken war wasaat ! Sonerien Kastellin, hep damant d'o dilhad kaer, a reas tro kêr, da embann n'oa tu ebet da badout er-mêz dindan eur seurt amzer. Met er c'hoc'hui hag er patronaj, e vije roet abadennoù betek an abardaez.

An dud a redas d'an daou lec'h, ha bec'h d'ar jeu ! Kan koroll ha soñ, e-pad teir eurvez d'an nebeuta. Kêc'hioù Pouldreuzig, Pouldergat, Lokronan, Kerfeunteun, Kastellin, Loperhet, Montroulez ha Kleder a dremenas pep hini d'e dro war an diou leurenn c'hoari, evit dudi an holl.

Ingall ha didruez, ar glao a gendalc'he. Peziou-c'hoari er patro, goude koan. Ne vo den ebet, a sonjemp-ni. N'eus nemet ar chas, ha c'hoaz ! hag a gredfe mont er-mêz gant eun amzer ken vil.

Ar patro a oa leun-tenn evit an abadennoù-noz.

Paotred Lanniliz, en o fenn an ao. Loeiz Fave, ar c'hure, a zisplegas evel ma c'houzont hen ober, « eun nozveziad reo gwenn » troet diwar ar c'hembraeg gant an ao. Perrot. Meur a hini a zo bet skoet gant ar pezh-c'hoari doanous-se, ennañ kentelioù talvoudus ha beo.

« Koroll ar balan alaouret » gant merc'hedigou Lokournan a voe dispar.

« Alan al Louarn » pezh-c'hoari all diwar bluenn an ao. Perrot, c'hoariet gant strollad an ao. Bleunven, person Lokournan, a ziroufennas an tal.

Devez kaer, daoust d'an amzer fall, evit ar brezoneg. Meuleudi d'an holl. Setu gêr an ao. Dujardin, evit kloza.

Chomet e oa a-dreuz avat, ar « jeu scénique » war sant Herve, diwar skrid an ao. Saig ar Go, renket gant Bernard de Parades.

« C'hoariet e vo disul, goude koan » ! Ar c'helou-se a rede dre holl evel eul luc'hedenn.

D'ar sul warlerc'h, eta, Bleun-Brug adarre. Gwellat eo ar sperejou. Digoret e oa an daoulagad. Hag ar c'hlapezenn-se hag a lavare ne die ket ar Bleun-Brug beza gwall garet gant an ao. Doue, pa roe d'ezañ amzer ken divalo, a oa koezet he meudig en he dourn.

Traoniennig Langongar a welas en noz-se, eur mor a dud. Eul lec'h kaer leun a varzoniez, a c'hlae a lann hag a valan alaouret. Netra all ebet ouspenn, nemet etre ar c'hoarierien hag an dud, eul lennad zour, ma skedé enni ar gouleier ha gwiskamanchou kaer Plougerne ha Kastellin. Merc'hed Landi siouaz ! ma oa deuet ganto o mouezioù dispar, o doa ankounac'haet er gêr o dilhad kaer.

Setu c'hoariva-noz Sant Herve. Bernard a zo en e wir wella. Nag a boan en deus bet ar paourkêz ! Bewech ma felle d'ezañ ober eur repetision bennak e teue glao. Doue a oar gwaska e vignoned. Neuze ez omp mignoned d'ezañ, rak gwaska en deus graet warnomp.

Da heul eo deuet an digoll. Marzus eo an abadenn. Evel ma vijemp kaset mil bloaz en a-dreñv. C'hoariva souezus e gwirionez. Tud o tifoupa eus a douez al lann hag ar balan : menec'h, rouaned, rouanezed, soudarded, eskibien, kezeg, bleizi, azened, brini ha koulmed, hag elez e-leiz, tro-war-dro d'ezo an heol, al loar hag ar stered. (Rêd d'in lavaret koulskoude, ne oa azen sant Hervé nemet eur mul. Ne vo kavet er vro a-bez, azen ebet, hag ar bleiz a gredas debri eun azen, ne zebras nemet eur mul.)

Dre daolennou beo, evel en eun huñvre, buhez sant Herve a dremenas evel-se dirak hon daoulagad. Pa varvas ha pa savas e ene d'ar baradoz en eur mor a sklerijenn, mil goulouenn a skedas en draonienn sioul, mil steredenn a lintras en oabl endro d'al loar-gann dispak he dremm, ha daou dantad bras a strinkas er vann o elfennoù lugernus e-keit ha ma strake war vuzelloù an holl, kantig ar Baradoz.

Eun daolenn baradozel ha ne vo ket ankounac'haet.

Prosesion ar goulou a gasas an holl d'an iliz evit bennoz ar Sakramant.

E. DONENO.



Prosesion ar Bleun-Brug e Gwened.

PHOTO « COURRIER »

Goude Bleun-Brug Gwened

N'emañ ket em sonj dibuna amañ kement a oa war roll an abadennoù gant dervezioù Gwened : ar c'hazetennou pemdeziek pe sizunveziek o deus graet mat o labour. E-touez ar c'hazetennou e rankomp trugerekaat muioc'h c'hoaz « *Le Courrier du Léon et du Tréguier* » ha « *Le Progrès de Cornouaille* ». N'eo ket eur wech ar bloaz eo e komzont eus hor menozioù met a-hed ar bloaz kouls-lavaret hag anaout a reomp kalz eus hor mignoned — ha me va unan — hag o devez mall bep sadorn da lenn dreist-holl an deirvet pajenn eus ar gazetenn-ze hag a vez ken plijus ha ken talvoudus. An drede pajenn-ze ne ra gaou ebet ouz ar peur-rest e-lec'h ma kavomp war doare ar bed hag ar vro pennadour poellek ha fur skrivet gant pluennou ampart.

Ar wech kenta e oa d'eomp beza degemeret en eur gêr vras hag eun tammig enkrezenn hon devoa en abeg da ze : daoust ha ne vefe ket re zisplet ha re dreudik hor gouelioù evit eur seurt kêr ?

Ha padal n'eo ket gwir ; kêr Wened a zo bet beuzet d'he zro gant en-groez ar Vleun-Brugerien : 30 laz-kana, 24 kelc'h-keltiek, 13 kevrenn, biskoaz ne oa bet gwelet kemend-all e Bleun-Brug ebet, ha d'o heul eur mor a dud.

Anzav a rankomp eo dihuñet da vat Bro-Wened d'an einzav breizek ha doare vat a zo evit ma 'z ay an traou war well a vloaz da vloaz. Helebin a zo brémañ etre ar rannvroioù : Leon, Treger, Kerne, Gwened hag ar re a zo loc'het da ziweza a zo war nez kemer ar penn. Helebin a zo frouezus ; evit strollad-ren ar Bleun-Brug ne 'z eus nemet eur Vreiz, laouen e vez pa wel e venozioù o c'hounit tachenn e tu pe du ha pa c'hell lavaret : « War araok ez comp ! » ha goude ma vefe-korn pe gorn gorrekoc'h en e gerzed ; en eur jed, ar pezh a gont eo ar c'hezeg-blein, ar re all a zeu atao da heul. N'am eus ket meneget Breiz-uhel ha koulskoude eno kennebeut n'eo ket kousket hor mignoned hag elec'h trevezi Breiz ar brezoneg e klaskont rei buhez d'o herez o-unan ; gwell a ze ! n'eo ket re vras Breiz evit ma rafemp fae war lodenn pe lodenn eus hor pinvidigezioù.

Hor rener-meur, *Gab. ar Moal* en deus digoret an abadenn en eur gonta d'eomp labour ar bloavezh tremenet. Frealzus e oa e glevet ; nemet ez omp evel spontet gant ar berz a ra hon emzav : dre ma kresk e teu, sklaer eo, da veza lontekoc'h hag ar re a zo karget d'e voueta a wan dindan ar zamm. Mali bras eo rei sikour d'ezo. Strolladour-ren skourrou Bro-Wened, Bro-Dreger ha Bro-Leon a ro d'eomp eun harp a bouez hag ar gouelioù savet ganto a zo bet kaset brao da benn. Eur gammed muioc'h hon eus da ober avat : ret eo, pelloc'h, seveni ar mennad a zo en hor spered abaoe ar penn-kenta : **ma vo e pep kanton, e pep parrez unan pe veur a hini eus hor mignoned hag a gemero, war e dachenn, ar garg eus labour ar Bleun-Brug : embann hor menozioù, mont da welet ar skolioù, ar c'helc'hioù keltiek, al lazou-kana. Klask koumananterien d'hor c'helaouennou, sevel eur gouelig ar bloaz gant kenstrevadegoù evit ar vugale hag ar yaouankizou evel ma 'z eus bed graet eur bloavezh gant « sulvez ar brezoneg », dibaba goude-ze bugale ha yaouankizou, lazou-kana hag kement-ze evit mont d'ar Bleun-Brug brasoc'h.** Evel eur roued a daolfemp neuze war Vreiz a-bez, labour kaer a vef graet evit Doue ha Breiz. **Ar re o defe c'hoant labourat war an ero-ze n'o deus nemet kas o ano d'an aotrou Seité** (1). Mat a vefe en em voda eur wech pe zioù ar vloaz etre mignoned an hevelep parrez pe ganton.

Kaozeadennoù a bouez hon eus bet, kouls e brezoneg evel e galleg, d'ar gwener ha d'ar zadorn.

Labour ar Bleun-Brug e Bro-Dreger, gant an Ao. *Cadoudal* eus Boulvriag. Dervezioù Boulvriag ha Pleuvihan a ziskouez ez eus tud a-benn ha tud entanet e Bro-Dreger.

An Aotrou Olliero, skrivagner ha barz, re nebeut anevzet — en deus komzet d'eomp anezañ Meriadeg Herrieu, beleg, mab da Loeiz Herrieu. Buhez Jorj Cadoudal, maro 150 vloaz a zo, a zo bet kontet d'eomp gant Albert Koué.

Da zadorn n'eus bet ano nemet eus ar zonerezh gant Per Derian, beleg, kelenner e kloerdi-bihan Santez Anna, gant Polig Monjarret, sekretour ar B.A.S., ha gant Paol ar Flem, eus a Vro-Dreger, o chom e Pariz, sonaozour brudet. War dachenn ar zonerezh etre vroadel n'hon eus ket da gaout mez pa c'hellomp menegi tud evel Bourgault-Ducoudray, Guy Ropartz, Paul Le Flem, Paul Lamirault, Louis Vuillemin, Louis Aubert, René Baton, Maurice Duhamel, Jean Gras, Adolphe Piriou, Roger Penan, Thielemans, Collin, René Guillou, Guillou-Verne, Jean Langlais, Jef Le Penven, an Aotrou Goasdoué, beleg, Pierick Houdy... Lod eus o oberou a oa bet roet da glevet d'ar gwener da noz, nemet e Gwened, daoust d'ezi beza eur gêr vrasoc'h, n'eus ket bet dedennet eur bern tud d'eun abadenn eus ar c'haera evel hounnez.

(1) Bleun-Brug, Ti-Carré, Kastellin.



An engroez dirak an iliz-veur, goude an oferenn-bred.

PHOTO « COURRIER »

Ar c'henstrivadegou.

Karout a rafed gellout mont d'ar zul vintin eus eur zal d'eben da heulia an holl genstrivadegou ! Ret eo dibaba peogwir e vezont holl d'an hevelep koulz hag awechou e andreadou disheñvel eus kêr. Eun dudi eo selaou al lazoukana hag hervez Paol ar Flem gwellaenn a zeu enno eus eur bloavez d'egile ; ar re wella anezo ne vefent ket da ziweza, pell diouz eno, ma karfent mont d'ar c'henstrivadegou etre vroadel. Plijus eo klevet ar vugale hag ar vugaligou o lenn, o kana, o tisplega, sonjal a ran e ene koz Breiz, roet d'ezañ gant pep rummad bugale o tont er bed eur yaouankiz flamm hag eun nerz nevez. Ma karfe ar vistri hag ar mestrezed-skol, ma karfe ar gerent dreist-holl, teñzor hor yez ne vefe ket en argoll ; lavaret a ran ar gerent dreist-holl, aes e vez gouzout pere eo ar vugale bet desket brezoneg d'ezo gant o zud, sikouret gant o zud e seli ouz kenstrivadegou ar Bleun-Brug ha pere eo ar re all o deus pledet ganto eus o gwella mistri ha mestrezed-skol.

Ar pezh a blij ar muia d'in — pep bini en deus ton pe zon hag a blij muioc'h d'ezañ — eo ar brezegerezh. Kaer eo gwelet paotred ha merc'hed yaouank, digor o spered, entanet o c'halon o tont da zisplega o menozioù e brezoneg war tra pe dra. Gouzout a reomp o deus poaniet da zevet o fennad ha goudeze d'hen displega a vouez uhel kant kwech marteze betek ma oar anezañ dindan enñvor holl dud an ti hag ar c'hontre. N'eo ket daouzek pe bemzek eo dleet e vefe met paotred ha merc'hed yaouank a gañchoù gant abadennoù e pep kanton araok ar Bleun-Brug bras evit dibaba ar re wella. Eur paotr yaouank, eur plac'h yaouank hag o deus kemeret perzh e kenstrivadeg ar brezegerezh a zo gounezet da vat d'ar Bleun-Brug.

An oferenn-bred.

Eur frealz eo evit renerien ar Bleun-Brug gwelet bep bloaz eskibien Breiz-Izel o tont d'ar c'hendalc'h, pe int-i o-unan pe vikeled bras kaset ganto en o

ano. Tadou-Abad eus manatioù bras Breiz a zeu ivez ; ar Breur-meur Elisé, superior Breudeur Ploermel n'hellas ket dont met ar Breur Mereal a oa en e lec'h. An aotrou kardinal Roques, arc'hiskob Gwened en deus lavaret e rafe eus e wella evit beza, er bloavez a zeu, e penn ar gouelioù bras a verko hanterkantvet bloavez ar Bleun-Brug, e Landivizio.

Ne ankounac'haomp ket eo bet savet ar Bleun-Brug gant eur beleg, an Aotrou Perrot, kure d'ar mare e Sant-Nouga, savet evit difenn war eun dro Breiz hag ar Feiz e Breiz.

Abaoe an deiz kenta o deus eskibien Breiz roet o skoazell d'ar Bleun-Brug o rei da c'houzout evel-se e plije d'ezo labour ar Bleun-Brug ; ar skoazell-zé eo nerz ar Bleun-Brug.

Setu perak gant kement kendalc'h e vez roet o flas d'al lidou sakr, hag he flas d'ar bedenn. An oferenn kreiz-norz hag an oferenn-bred a vez atao ar mareoù fromusa eus hor gouelioù. Siouaz ! ne gavont mui iliz vras awalc'h ebet evit hor reseo hag e Gwened n'hellas ket an hanter eus an dud mont tre en iliz-veur evit an oferenn-bred, kanet gant an aotrou 'n Eskob Beleg. An aotrou Lohier, person-kanton Gemene a reas eur zarmon gaer, e brezoneg gwened aes-tre da gompren.

An abadenn abardaez hag ar brosesion vras.

Goude merenn e zoamp pedet da vont e « park » ar prefed-ti evit an abadenn koroll ha kan.

Gant ar c'helc'hioù keltiek hag al lazoukana e vo lezet al leurenn c'hoari vras ; dirazi eun engroez vras a dud a zo diredet. Ha setu dibunet tro ha tro gant kanerien ha korollerien santimanchou pobl ar Vretoned : istor ar vro, ar garantez, ar vicher, ar mor, ar feiz kristen ; dudius d'an daouflagad ha d'an diskouarn, fromus d'ar galon, setu Breiz en he c'haer hag en e sked. Gwellet am eus en dervezioù tremenet, strolladoù folklorel Bro Sveden ha Bro Yougo-Slavia hag e lavaren ennon va-unan : pep bro he deus he doare da zisplega trivliadennoù he c'halon, kaerder a zo gant pep-hini met p'en deus Doue roet he lod da Vreiz n'en deus ket graet a c'hoap outi.

Echu an abadenn c'hoari digor ar brosesion hor c'has bremañ betek an iliz-veur a dreuz kêr. Biskoaz n'ez eus bet gwelet kement a yaouankizou na kement a wiskamanchou disheñvel e brosesion ebet ; modest ha leun a feiz e tiskouez an holl beza hag hed-a-hed da straejou kêr a gleiz hag a zehou an arvesterien, int-i ivez, a gemer perzh er bedenn hag er c'han, o welet Breiz o tremen, Breiz yaouank feal d'ezhi hec'h-unan ha feal d'he Doue. En iliz-veur ne vo plas nemet evit ar yaouankizou evit bennoz ar Zakramant hag an aotrou 'n Eskob n'hell ket en em viret da bignat er gador ha da lavaret — e brezoneg — bennoz Doue d'an holl : leun barr eo e galon a levenez.

Echu eo Kendalc'h ar Bleun-Brug, skuiz eo an dud met laouen da veza rentet enor d'o Breiz ha d'o feiz.

Echu n'eo ket peogwir an ebadenn merket evit ar zadorn da noz a voe bet apellet gant an amzer fall. D'ar zul da noz e vazo graet dirak mogerioù koz kêr Gwened « Breiz dre ar bed », c'hoariadenn savet e galleg gant J.-P. Foucher lakaet war leurenn gant sikour Bernard de Parades hag eur strollad c'hoarierien eus an Naoned. Netra ne rae diouer : na sklerijenn na sonerez, na buhez, nag awen ha barzoneg Saint-Pol Roux a zave evel eur bedenn en noz boull : Dre ar bed eo aet ar Vretoned en amzer tremenet, dre ar bed ez eont c'hoaz evel sachet gant eun huñvre dedennus o lintra en o daoulagad glaz ; o klask emaint an douarou burzudus, douarou ar gened hag ar yaouankiz, oc'h hada emaint karantez feiz ha levenez.

V. F.

Kenstrivadeg ar prezegerezh e Gwened

Koazcadenn YANN AR GRALL, eus ar Vilar-Grenn, Kastell-Paol, bet d'ezan ar priz kenta.

EREIZIZ, VA MIGNONED,

Lavaret ez eus bet d'in komz d'eoc'h diwar-benn ar c'han ha pa zellan endro d'in pe kentoc'h pa zelaouan, ne glevan nemet kan ha son o tarza bep tu.

Ya, etouez krouadurien an Aotrou Doue n'eus nemet an den hag en defé bet ar galloud da gomz, met ar galloud da gana a zo bet roet da galz anezo. Lavaret a ra ar barz : « Al laboused a gan, an heol a zo laouen, pegen kaer ar maeziou gant o bleuniou melen ». Ya, ar bed holl a gan hag an avel o yudal pe o sournal, ar mer o pokat d'an aochou pe o sailha war ar c'herreg, ar stered o para en nozveziou boull, pep tra a gan er bed d'an neb o oar selaou.

Met n'eo ket eus seurt sonerezh eo am eus da gomz d'eoc'h hirio, kentoc'h eus kan mab den e Breiz.

Pep den, en e istor, en deus savet soniou, gwerziou, kanaouennou evit rei da glevet mouez e galon, rust pe dener, doanuis pe laouen ha pobl ar Vretoned evel ar re all.

Kanaouennou a vrezel a roe kalon d'ar stourmer hag a gase pell dioutañ ar sponterezh.

Kanaouennou all a zo hag a laka da ziwana pe da greski ar garantezh-vro, hag a laka evel eul liamm a unvaniezh etre an holl Vretoned. Selaouit-ta Bretoned o kana ar « Bro Goz » dreist-holl pe vezont divroet. Sonj am eus e bodadeg vras an Ykamiz e Paris pevar bloaz 'zo, pegement e lammas va c'halon em c'hreiz pa stagas ar Vretoned yaouank da gana ar « Bro Goz » ha ma savas en o zav an dek mil ha tri ugent a yaouankizou a oa eno bodet, diredet eus pevar c'horn Bro Frans.

✱

Kanaouennou all a zo bet savet evit gloar Doue, ar Werc'hez hag ar zent. Daoust hag eur bobl all a zo war an douar hag en defe ken kaer kantikou hag ar Vretoned ? Yann Per Kallo'h a dride e galon o klevet ar zoudarded war harzou ar vro epad ar brezel o kana kantig ar baradoz « Ar c'haera eus Kantikou an Douar », ha va-unan e tigouezas ganen kemend all da geñver eun abaden-studi pa voe achuet an dervez en eur gana, war hanter-vouez ar c'hantig dudiuz-se.

Met pet ha pet all a zo hag emacr bremañ o klask o mouga evit lakaat en o flas kantikou gallek re alies divlaz. Anaout a rit kantig Santez Anna, kantik Sant Yan, kantik Sant Erwan, kantikou Mamm Doue, ganto c'houez an ezañs d'an oferen-bred, ha c'houez ar bokedou ouz an aoter. Douget ganto evel gant diwaskell e sav hon ene warzu an neñv.

✱

Kanaouennou all hon eus c'hoaz, a bep seurt, hor laka tro ha tro da c'hoarzin ha da leñva, soniou laouen da gana hor c'harantezh, hor micheriu, kaerder hor bro hag hor maeziou ; gwerziou trist da rei da anaout kement a wask hor c'halon. Plijout a ra d'eomp o c'hana pe o c'hlevet kana. Lod a zo koz hag a zeu d'eomp a-dreus ar rummadou tud o deus bevet en hor raok, lod all a zo nevesoc'h evel « Luskell va bag », « Va zi bihan », « An noz », « Ar Falc'herien », « Ar Voracrien »..., holl ez int kaer evidomp hag an diavaezidi, desket pe zizesk, a jom bamet ouz o zelaou.



Pet kwech, diouz an noz, o tont diwar va labour, e plij d'in mouskana hini pe hini anezo hag e nij kuit ar skuizder eus va izili morzet. D'ar gouelioù pe frikoioù hon devez tro da skigna ar soniou-ze, ganto blaz ar vro hag ar maeziou.

« Maro eo ar soniou brezonek, a lavarer ; goustadik, paotred ! Ma karomp, ni yaouankizou a raio eur vuhez nevez d'ezo. Ganeomp-ni eo emañ alc'houez an amzer da zont. Nemet hon eus ezomm soniou nevez a vloavezh da vloavezh. Kavet e vo tud a vicher da zevel ton ha son ha ni hon-unan, a zavo soniou nevez evel ma rae gwechall kouerien ha kemennerien. Mouez Breiz a dregernno ganti c'hoaz ar bed hag etouez ar poblou o kana, ne jomo ket mut ar Vretoned.



Kenstrivadegou Bleun-Brug Gwened 1954

Pell e oa eun tammig klasou St-Fransez diouz ar ru. Dre lakaat skritelloù a-walc'h ez eur deut a-benn da heñcha ar varnerien (rak int eo hag a oa degouezet ar c'henta eno), ar vugale hag eun nebeut tud all.

Daou rummad barnerien a oa evit ar vugale-skol : unan gwenedek hag unan K. L. T. Hogen evit ar prezegerezh, ar c'han-pobl hag ar rimadelloù ne oa nemet unan, ennañ barnerien eus pep kornad.

Prezegerezh (pennvarner : an ao. chaloni Falc'hun, eus Skol-Veur Roazon) : eun dek bennak a genstriverien. Aet eo ar maout gant Leoniz. Trugarez bras d'an Itron gontez Rohan-Chabot hag he deus kinniget eur priz dispar evit ar genstrivadeg-se : 20.000 lur.

KanPobl ha Rimadellou (pennvarner : an ao. 'nEstour) : eun dek bennak evit ar c'han, met 3 hepken evit ar rimadelloù. Darn eus ar c'hanaouennou n'int ket poblek awalc'h, hervez ar varnerien.

Danevell : Holl a Vro-Wened. 3 dever dreist-holl o deus plijet d'ar varnerien, renet gant an ao. Gallic, eus Kloerdi Keranna.

Displegerezh : Den ebet eus Bro-Gerne, nag eus Bro-Leon. Eus Bro-Wened, paotred eus Sant-Teliau (kaset gant an ao. Loric) ha merc'hed eus Meslan ; eus eskopti St-Brieg, dreist-holl paotred ha merc'hed eus Tremargad (kaset gant an aotrou Person).

Lenn : Den ebet eus Bro-Wened, ha nebeut eus lec'h all. Daou briz kenta a zo aet da Vulien (Bro-Dreger) parrez an aotrou Klereg.

E kenstrivadeg ar C'han e oa ar muia a vugale, dreist-holl merc'hed, eur c'halz anezo eus skolioù kêr Wened.

Treserezh (pennvarner : X. Langleiz) : Gant-merc'hed ar muia anezo eus skol St-Jozef Pondi, ez eo aet an holl brizioù.

Evit ar c'henstrivadegou-skol n'eo bet Bleun-Brug Gwened nemet eur Bleun-Brug bihan e-keñver re Bleuvin ha Lokournan. Eveljust n'oad ket o c'hortoz eun niver bras a genstriverien eus an eskoptioù o doa bet dija eur Bleun-Brug. Met e Bro-Wened zoken ez eo bet bihan an niver anezo. Gwir eo, diaesoc'h eo tolpa ar vugale e-doug ar vakañsoù eget epad an amzer-skol.

Gourc'hemennou d'an holl (kerent, mistri, bugale) o deus labourer evit enor ar yez e Bleun-Brug Gwened. Bennoz Doue d'an dud vat hag o deus kaset prizioù pe brofoù. Bennoz Doue d'ar varnerien ha barnerezed, en o zouez beleien eus an 3 eskopti, Frered eus 3 urz, Seurezed a bep « liou », ha tud a volonteiz vat, evel an doktored Laurent, eus Abijan, ha Tricoire, eus Kastell-Briant. Eun « trugerezh » kalonek d'an Aotrou Ensellour Tallec, hag en deus graet e seiz gwella evit ma tremenfe aes ha reiz kenstrivadegoù Bleun-Brug Gwened.

K. R.



Laz-kana Plouzeniel, bet d'ezo ar priz kenta e Gwened.

PHOTO « COURRIER »

Ar re genta e Kenstrivadegoù ar Bleun-Brug e Gwened

PREZEGEREZ. — Paotred yaouank : Meuleudiou ar varnerien da Ber Chapalain, Kastell, bet dija ar c'henta.
1. Yann Grall, Kastell.

Merc'hed yaouank : 1. Mari-Loeiza Fily, Gwiseni.

RIMADELLOU. — Paotred yaouank : 1. Jerard Ar Boule'h, Groñvel.

Merc'hed yaouank : 1. Annaïg Ar Mee, Tremargad.

KAN-POBL. — Gwazed : 1. Loeiz Guyot, Baod.

Merc'hed : 1. Mari Cadoudal, Boulvriag.

DANEVELL. — 1. Joheb En Tutour, Kamorh (Skol Itron-Varia er Sklerder, Baod).

DISPLEGEREZ. — Paotred vras : 1. Ivon Er Meliner, Langedig (Er Sklerder, Baod)
ha Loeiz Ar Gwilcher, Boulvriag.

Merc'hed bras : 1. Loezaïg Er Roy, Meslan, ha Jisela Allenou, Groñvel.

Paotred krenn : 1. Feliz Er Boulch, St-Telliaù, ha Loeiz Lefevre, Tremargad.

Merc'hed krenn : 1. Nikola Er Mestre, Meslan, ha Mari-Paola Cam, Tremargad.

Paotred vihan : 1. Yehan Er Forestier, St-Telliaù.

LENN. — Paotred vras : 1. Gwenael Maze, Lopereg.

Merc'hed bras : 1. Kristina Allenou, Groñvel.

Paotred krenn : 1. Ifig Bodiou, Bullen.

Merc'hed krenn : 1. Gwenola Trevidic, Karaez.

Paotred vihan : 1. Yehan Er Forestier, St-Telliaù.

KAN. — Paotred vras : 1. Yehan-Pier Er Pavec, Trusag, ha Denez Jeron, Tremargad.

Merc'hed bras : 1. Mikaela Dagorne, Ar Galon-Sakr, Gwened, ha Kristina Allenou, Groñvel.

Paotred krenn : 1. Yann Chafotec, Boulvriag.

Merc'hed krenn : 1. Madalen Er Fur, Meslan, hag Annaïg Jeron, Tremargad.

Merc'hed bihan : 1. Monika Lotti, Ar Galon-Sakr, Gwened.

TRESEREZ. — Merc'hed bras : 1. Mari-Tereza Toussaint, St-Joheb Pondi.

Merc'hed krenn : 1. Moriseta Limousin, St-Joheb Pondi.

Merc'hed bihan : 1. Madalen Jollive, Ar Galon-Sakr, Gwened, ha Kler Le Brun, Kastell-Paol.



LAZOU - KANA

Tregoul Laz-kana a zo bet o konkouri e Gwened. Setu amañ anezho al loreidi.

Peder mouez disheñvel (A) : 1. Gwengamp ;
2. Landreger ; 3. Lesneven ; 4. Kastell-Paol.

Dreist-konkour : Laz-Kana Landivizio, bet da genta er bloavezioù diweza.

Peder mouez disheñvel (B) : 1. Plouzeniel ;
2. Plougerne ha Plistin ; 3. Kanerien vihan St-Brieg ; 4. Noal-Pondi ; 5. Karahez ; 6. Trussac-Gwened ; 7. Plouhineg (Morb.) ; 8. Treboul ;
9. Pluvigner.

Laz-Kana tiegez : Familh Marker, Kistrebere'h (Morb.).

Teir mouez ingal : 1. Santez-Anna Conleau, Gwened ; 2. Sant-Jozef Pondi ; 3. Enez Groe ;
4. Skol ar Galon-Zakr, Gwened.

Diou vouez : 1. Bignan ; 2. Enez Arz ; 3. Kleger ; 4. Penkesten ; 5. Meslan.

Dreist-konkour : Kanerien vihan Santez-Anna-Wened, Sant-Visant-Gwened ha Sant-Jozef Lannuon.

KELO'HIOU-KELTIEK

Ar c'helo'hioù-mañ a zo bet o koroll e Bleun-Brug Gwened :

Pouldreuzig, Pouldergat, Douarnenez, Lokronan, Kastellin, Plougastell, Karahez, Poul-laouen, Rostren, Kallag, Boulvriag, Plistin, Langonnet, Baod, Gwened, Kernasen, Henbont, Ambon, Ploermel, Pluherlin, Allaire, Gwenrann.

BAGADOU SONERIEK

Bugale : Lannuon, Boulvriag, Poudregat, Sant-Visant-Gwened, Santez-Anna-Wened.

Re vras : Kastellin, Baod, Gemene, Landaul, Kraeh, Bignan, Ploermel.



Alain Cochevelou,
11 vloaz, a c'hoari gant an delenn
e Bleun-Brug Gwened.

PHOTO « COURRIER »

Le concours de chorales du Bleun-Brug

Le maître Paul Le Flem a bien voulu nous confier ses impressions sur ce concours. Nous sommes heureux de les reproduire dans La Bretagne :

Trente chorales ont pris part au concours organisé par le Bleun-Brug. Un concours brillant où chacune des sociétés apporta une bonne volonté et un goût pour le chant collectif extrêmement encourageant, qui nous montre, mieux que des promesses, des réalisations certaines. Il importe ici d'insister sur le mérite de chefs qui, certes, ne trouvent pas toujours toutes les facilités pour réunir des chanteurs et obtenir une régularité parfaite aux répétitions. Or, répétons-le, c'est de la présence à ces répétitions que dépendent les progrès et les résultats. Il faut donc que ces chanteurs bénévoles, qui ont certainement conscience de l'utilité de leur rôle, puissent assurer leurs directeurs d'une rectitude et d'une régularité sans lesquelles les résultats risquent d'être illusoires.

Autre remarque : on ne saurait trop recommander à ces groupements sympathiques et pleins de dévouement de se tenir dans une ligne strictement bretonne. Par là, nous leur demandons de faire confiance à leur admirable folklore et de n'admettre que des sujets pénétrés d'un esprit inspiré du terroir et, retenons cette recommandation, des fidèles aux modes musicaux bretons. Il existe des harmonisations de chants bretons fort bien comprises. Que nos chanteurs empruntent, ou mieux, continuent d'emprunter leur répertoire à ces chants. Ils resteront ainsi dans la couleur bretonne et ne s'écarteront pas de la ligne qu'il leur est conseillé de suivre.

C'est là, du reste, la ligne qui fut observée par la très grande majorité des groupements qui se présentèrent devant le jury chargé de les juger. Et il faut savoir gré de cet effort, de cette fidélité à une jeune tradition qui se maintient et qui, n'en doutons pas, sera observée et soutenue. Nos chants bretons ont une extraordinaire richesse d'accent. En restant dans leur sillage, le chant choral breton ne risque pas de faire fausse route, ni de s'égarer. Et puis, ne laissons pas se perdre dans l'oubli ces mélodies qui ont, pour se défendre, le prestige de la beauté et de la vie, d'une vie cueillie sur une terre qui n'a pas démerité.

On saura gré à ces chorales bretonnes de l'ardeur et de l'intelligence qu'elles ont montrées au cours de ce récent concours. On a pu remarquer la présence de belles voix, de pupitres riches de couleur. Il y avait un évident souci de style et un sentiment de la recherche des nuances. Mais, soyons francs, on peut encore aller plus loin dans la recherche de l'équilibre. De ce point de vue de l'équilibre, nous demanderons qu'il y ait, parfois, plus de rigueur dans le nombre des chanteurs affectés à tel ou tel pupitre de voix. Ce n'est pas toujours très facile, et dans la constitution d'un pupitre masculin, il n'est pas toujours aisé au chef de chœur de compter sur le nombre de chanteurs souhaité. La critique est toujours aisée, et l'art...

N'importe ! Que ces remarques ne découragent personne... Qu'elles soient, au contraire, un stimulant. Nos chorales sont animées d'une magnifique foi artistique. Elles l'ont montré au cours du récent concours du Bleun-Brug. Elles ont de la vaillance. Leurs moyens vocaux sont souvent d'une belle qualité. Nos pays humides produisent des voix aussi pleines, aussi chaudes de timbre et d'accent que les pays du soleil... Voilà qui est encourageant. Donc, pas de complexe d'infériorité. Courage, confiance et... travail...

Paul Le Flem.

La conférence de Maître Paul Le Flem, au Bleun-Brug de Vannes, sur les grands auteurs de la musique bretonne, a été publiée dans le *Courrier* et le *Progrès* du 6-8-54, 8, rue des Gentilshommes, Quimper.

KORN AL LIZIRI

Goude Bleun-Brug Gwened

Gant plijadur hag anaoudegez vat ec'h embannomp amañ warlerc'h pevar eus al liziri pouezusa deuet d'eomp goude Bleun-Brug Gwened. Al lennerien koulz ha ni, a c'hello tenna anezo o mad.

Ar penad kenta a zo tennet eus lizer an Aotrou meur Baron, vikel vras Gwened. Goude beza trugarekaet an holl labourerien eus ar C'homite bras hag ar C'homite lokal, ha lavaret pegement eo bet plijet ha skoet gant ar Bleun-Brug ha dreist-holl gant niver hag emzalc'h ar yaouankizou, e lavar kement-mañ :

Après le grand succès du Bleun-Brug de Vannes, me serait-il permis d'exprimer deux ou trois vœux ?

Cette poussée de la jeunesse bretonne en ce moment dans le cadre du Bleun-Brug, est-ce un feu de paille, un emballement d'un jour pour quelques années et puis c'est fini ? Non, ce mouvement n'est pas superficiel, il sort du tréfonds de l'âme bretonne, qui aime sa Bretagne, et qui, tout en appréciant le bel héritage du passé, aspire à se renouveler et à s'adapter aux exigences modernes, pour la richesse et la beauté de la grande patrie.

Mais ne se trouve-t-il pas là pour nous un moyen de résoudre plus à fond le problème des loisirs ? Ce n'est pas tout de défendre telle ou telle distraction malsaine, il faut en proposer d'autres, propres, bienfaisantes, qui permettent aux forces jeunes de se détendre pour un plus grand épanouissement spirituel. Or le Bleun-Brug nous offre une veine à exploiter, constitue un apport précieux, qui comble une lacune certaine et répond aux aspirations de l'âme bretonne.

D'autre part il y a là une jeunesse qui ne demande qu'à bien faire, qui est déjà l'élite de nos paroisses. Il n'est pas question de l'abandonner à ses réjouissances extérieures. Mais quelle force, quel espoir, ce serait, si déjà, comme dans certaines paroisses, l'Action Catholique, non seulement vit en bonne harmonie et en excellente amitié avec elle, mais y pénètre comme dans son élément de choix. Tout en restant elle-même, plus que des équipes de football et des sections de gymnastique, elle est à même de devenir une entraîneuse à l'intérieur de nos paroisses. Mais, il n'y a pas de temps à perdre, une mise au point urgente est à faire.

Ensuite je ne vois pas pourquoi ce mouvement du Bleun-Brug ne s'étendrait pas à toute la Bretagne, même galloise. La langue est un élément important, mais il n'est pas le seul à caractériser la physionomie spéciale de notre peuple. Il y a l'histoire, les légendes, les traditions, la danse, la musique, l'art sous toutes ses formes, le social avec le problème de l'émigration, tout le folklore, tout ce fond commun à toute la Province et qui la distingue des autres. Cloisonner la Bretagne et la diviser en deux, le pays bretonnant et le pays gallo, ce serait mutiler notre patrimoine, et, au contraire, s'unir pour une même œuvre et un même idéal, ne peut que multiplier nos forces pour le bien général et la fécondité de notre action sous tous les rapports.

Enfin le Bleun-Brug du premier dimanche d'Août ne doit pas être la fête d'un jour, mais le couronnement de tout un travail d'année. A cette

intention, une organisation s'impose, qui serait spéciale selon le dialecte. Il semble que ce soit fait dans le Trégorois. Il y a eu des essais ailleurs. Le tout a besoin de se préciser, avec différentes sections qui se partagent le travail, et à la tête de chaque section un responsable. Comment susciter des initiatives, coordonner les efforts, contrôler l'ensemble ? En tout cas, il faut vite entreprendre quelque chose, si l'on veut que le Bleun-Brug ne se répète pas, se renouvelle, dure et s'achemine sûrement vers des succès toujours plus beaux et plus substantiels.

Ce serait injuste de ne pas reconnaître et apprécier ce qui a été fait. Les récollections et les sessions de l'année passée ont apporté sans nul doute une contribution notable à la vie et à l'esprit du Bleun-Brug. Mais il faut tendre à mieux, toujours avec plus de méthode et de profondeur. La cause en vaut la peine. Elle se résume en deux mots, qui, pour nous, Bretons, ne peuvent se séparer : « Doue hag er Vro ! »

Ch. LE BARON,

Prélat de Sa Sainteté, Vicaire Général de Vannes.

**Eur stourmer koz met yaouank c'hoaz
a lavar e soñj diarbenn Bleun-Brug
Gwened.**

C'hoant a zo deuet d'in da skriva d'oc'h eun dra bennak diwar-benn Bleun-Brug Gwened.

Abaoe Bleun-Brug Lannuon er bloaz 1938, n'em boa gwelet Bleun-Brug all ebet. Aet e oan bet d'ar Bleun-Brug-se evel eur stourmer breizat c'hoant d'ezañ en em gavout gant stourmerien all evelad.

« Hag omp aet en hent p'edo tarz an deiz,
« O c'houlaoù drant kern menezioù Breiz ;
« Hag e kanemp holl hag e kanemp hir,
« D'hon hufvreoù kaer a oa deut da wir. »

Siouaz !...

Met en dro-mañ e oan deuet d'ar Bleun-Brug evit gellout arvesti dreist ar c'hleuz, troetoc'h da selaou ha da sellet ouz an dud eget da welet ar pezh a dremen war al leurenn-c'hoari.

N'eo ket eun dra aes, ouspenn ma 'z eo difrouez evit eun diavêziad. Evelse, eur skrivagner gall deuet da Vleun-Brug Pont 'n-Abad, er bloaz 1933, a anzave n'en doa komprenet netra er gouel-se m'ac'h en em vade ennañ eur bobl, didrous o selaou he c'hanaouennoù d'ezhi ha disaouzan o sellet ouz he dañsou. Bez' ez oa eno marteze, tud yaouank hag a dabute taer... met e brezoneg eo e komzent.

E Gwened, el lec'h m'oun en em gavet evit abadenn ar sul goude merenn em eus kavet an hevelep tud a gaved en hor Bleun-Brugou araok ar brezel, met Gwenediz eo a zo amañ da lavaret eo eur bobl siriusoc'h ha doujusoc'h, hag evel lentat o welet displega hec'h ene a-wel d'an holl dre dañsou ha kanaouennoù ; eur bobl feul avat enni c'hoaz an tan bet enaquet gant ar Bayon ha Loeiz Herrieu.

An dud-se a oar prederia ha kempoueza : Eveljust e kavont an dournerez tredanek aesoc'h eget ar freilh, ar vag dre dan aesoc'h eget ar vag dre lien... met, na pegement kaeroc'h c'hoariou o zud koz goude o labourioù, o c'hanaouennoù lusket gant o levenez hag o foanion ivez.

Me, diouz va zu, am eus gelllet keñveria. Treuzet em eus en eur zont eur pardon-foar, en eur vourc'hadenn e-kichen.

Merzet em eus er Bleun-Brug-mañ, muioc'h a veleien a leaned hag a leanezed ; hirio, a drugare Doue, en hor skolioù e vez taolet muioc'hik a evez ouz an traou breizek.

Bez' e kaved c'hoaz an douristed hegarat bet plijet gant gouelioù folklorek met c'hoan t'd'ezo gwelet eur gouel siriusoc'h ha tostoc'h d'ar vuhez gwirion.

Gwelet e meus, erfin, amañ hag a-hont, eun tammig en diavaez, a-strolladon, a varvailhat laouen pe o kuzulikat kenetrezo, stourmerien goz, bet keneiled d'in, hag ivez tud yaouank leun a dan hag a vuhez evel ma tere ouz tud e barr o yaouankiz.

Ar re-mañ avat, fringus evel kezeg yaouank, a c'hell kavout ez a ar Bleun-Brug re c'houstad evito, evel ma kredfent n'emañ mui an Aotrou Perrot krog er rod-tur.

Bez ez eus re all, disfiziuz dre natur, hag o deus aon atao na vefe ar Bleun-Brug eur strollad politikel. Sioulaet int evelato gant ar bannieloù trilioù a welont o ficher amañ hag a-hont, e-kichen bannieloù Breiz, ha pa deuer da gestal evit ar brezoneg e tigoront zoken brokus o yalc'h.

Daoust ma 'z eus kemm etrezo an hevelep pobl eo an dud-se, hegaset gant an distera tra a wel o vont a-dreuz pe a eneb d'he c'hoant war al leurenn-c'hoari, met plijet kenañ gant ar strolladoù gwirion-tre, evel Poullaouen, da skouer. Eur bobl diès eo da gontanti, ha se a zo mat. Ret eo eta kinnig d'ezhi atao abadennou eus an dibab pe ne vo ket gounezet he c'halon.

Evel-se, gouelioù ar Bleun-Brug a zo hag a ranko beza disheñvel diouz Gouelioù-Kerne-Kemper, hag a zo dreist-holl gouelioù folklorek da skei an dud troet war an traou-se hag an douristed.

Ar Bleun-Brug a rank beza pardon bras bloaveziek ar Vretoned, goude o labourioù tenn. Marteze e rankfe beza troet muioc'h gant prederioù an amzer vremañ hag an amzer da zont.

N'e meus ket gelllet, siouaz ! heulia ar Bleun-Brugou all bet graet abaoe ar brezel ; eun troc'h bras a zo eta evidoun etre Bleun-Brug Gwened hag hini Lannuon. Kredi ' ran, avat, emañ war an hent mat, hag eo bet ar Bleun-Brug-mañ evel eun akt a feiz kristen ha breizat.

Kerkent, goude an abadenn-c'hoari, an engroez en em renkas penn-da-benn d'ar ruioù evit gwelet an « défilé » a dlie beza eviti ar skeudenn ziveza a gasfe ganti evel « lodig ar pardon ». A-greiz holl, a zindan dor vras kêr, e wel o tifoupa, Kroaz Hor Zalver, ha war he lerc'h bugale gwisket e gwenn, o vale goustadik ha devot. E-lec'h eun « défilé » eur brosesion eo a wel dirazi. Souezet eo da genta oc'h en em c'houlenn petra ober pe stlaka an douarn pe ober sin ar groaz. Hag e tremen ar strolladoù : bannieloù er vann, kantikoù o tregerni, merc'hed gwisket kaer evel bokedou-mae, gwazed sirius, sonerien stouet war o biniou, gwenediz dreist-holl, evel chouanted o vont d'ar stourmad.

Eur mor a yaouankizoù ! Bremaik edont o tañsal hag o c'hoarzin laouen ; bremañ emaint o pedi, dic'hoarz. Gouzout e reont ez int kannaded Breiz kristen kaset daved ar bobl a zo aze. Evel dibradet gant ar skouer vat a wel, setu ma tiwan ivez ar bedenn war muzelloù ar bobl-se, pedenn ar c'hanyedou tremenet, ankounac'haet dec'h marteze, met adkavet hirio : Ha pa vo tremenet ar brosesion, e vo chachet ganti d'he heul betek an iliz-veur.

Chom a raio da viken em spered, an eñvor eus bennoz ar Sakramant-se, en eun iliz-veur re vihan, gant hekleo ar c'hantikou hag ar c'hanou santel. « Ben-niget ra vo ar re o deus graet da Vreiz beza kristen. » Ha nag ez eo c'houek ha kennerzus komzou a drugarez an Aotrou 'n Eskob Bellec oc'h ober hekleo da gomzou hon Tad Santel ar Pab nevez klevet e Santez-Anna-Wened : « Diga-neoc'h eo e c'hortozan lodenn wella va levenez ».

Anzav a rankan ne oan mui, er gouel, eun arvester mut ha diseblant. Ha pa welis o tispaka dirak va daoulagad, an abadenn noz, ne daolen mui evez ouz an dud a oa endro d'in, gounezet ma oan gant kaerder an taolennou. Peur e c'hell-

limp-ni, c'hoari kemend-all e brezoneg penn-da-benn ? Pa garimp dihuna ha labourat a-zevri, gant kalon ha karantez, hon daou zroad war an douar. evit ar bobl a zo dirazomp ; el lec'h koll amzer o klemm, o pismiga, o tispenn, diskennomp daved pobl ar Vretoned : ar re a labour, ar re a boagn, ar re a c'houzañv... Diskouezomp d'ezô braster hor c'halon, ledander hor spered, dounder hor madelez... Oberou ha skoueriu da genta, hon aliou hag hor prezegerez a vo digemeret goude.

En deiz warlerc'h o kuitaat Gwened, e welen diskenn diouz an ti-kêr banniel Breiz ha banniel Bro-C'hall. Bet e oant e-doug tri devez en eur gichen. Nag em bije karet o c'hlevet o kuzulikat didrous an eil d'egile. An dud ivez a dlefe en em gaozeal evel me ra an traou.

F. K.

Ar Bleun-Brug gwelet gant eur paotr yaouank eus an emzao breizek a vremen.

M'am bije bet skrivet va soñjou a-zivout Bleun-Brug Gwened, raktal da fin ar c'hendalc'h n'em bije kavet nemet meulcudi bras da ginnig.

Piou, e gwirionez, eus ar re a zo bet e Bleun-Brug Gwened, n'eo ket bet gounezet gant an aergelc'h souezus a blave war ar gouel-se ! Aergelc'h hag a oa anezañ eur spered didroidell ha leun a dan, a feiz hag a volentez vat ; eur gouel serius ha laouen war an hevelep tro !

E Gwened, kement hag el lec'h all, en despet d'an diesteriou a gaver en eur gêr da sevel seurt gouelioù, en despet ivez d'eun amzer ken arvarus, eo deuet ar Bleun-Brug a-benn da groui an aergelc'h ma komzan anezañ. Ennoun va unan eo bet en em silet, muioc'h eget e n'eus forz peseurt kendalc'h all. Perak ? marteze abalamour d'ar boan a zo bet renket kemer, pe marteze ivez en abeg m'am eus ennañ kemeret perz da gas endro ar gouel.

Amzer am eus kemeret abaoe da brederia, ha setu ma c'hellan, da heul ar veulcudi a gasan, kaout da lavaret eun dra bennak all ouspenn. Ret e vefe, d'am meno, lakaat ar re yaouank da gaout muioc'h a berz er gouel. Ret e vefe d'ar Bleun-Brug beza muioc'h o zra, miret na vefe evito eur gouel folklorek hepken. Ret eo anzav, avdt, o deus bet er bloaz-mañ da bennaoui el lid diweza a zo bet graet en iliz-veur, evit kloza ar broseston. Den ebet, eus ar re o deus gwelet an ilizad yaouankizou-se o youc'hal he feiz hag hec'h uhel-vennad, ha klevet komzou kalonekaus an Aotrou 'n Eskob Belleg, ne c'hell beza chomet diseblant.

Evelato, eun den yaouank entanet, a gavo n'eo ket graet ar Bleun-Brug a-walc'h evitañ. Koulz war dachenn Feiz ha war dachenn Breiz, emañ hemañ o c'hortoz muioc'h digant ar Bleun-Brug. War ar poent-se, abadenn-studi Gwened, er goañv diweza, a zo bet evitañ kalz efedusoc'h : prezegennoù graet muioc'h dioutañ hag evitañ, dres ar pezh emañ o klask.

An hevelep tra a lavarin eus devezioù Karnag ha Lokorn : Devezioù pre-sius dre an niver a yaouankizou tolpel, a ro tro d'ezo d'en em anaout, d'en em laouennaat ha da gemmesk o soñjou e-serr beza kelennet.

Evit ma vo Gouelioù bras ar Bleun-Brug ken efedus evit ar re yaouank, e vefe ret d'ar prezegennoù beza muioc'h troet ouz an amzer da zont, ha savet en eun doare ma c'hellfe pep hini lavaret e sonj ha kemer perz er c'haozeaden-nou. Ret eo e vefe ar prezegennoù-mañ evel eun astenn hag eur c'hendastum eus an devezioù-studi graet e-doug ar bloaz tremenet. Neuze, d'am meno, e vefe, ar Bleun-Brug, evit ar yaouankizou, o gouel d'ezo.

G. P.

Eus eul lizer, bet digant ar Sonoazour
breizad, an Ao. PAOL AR FLEM, e ten-
nomp ar pennad a zo amañ da heul.

Pour ce qui concerne le Bleun-Brug de l'an prochain, ne serait-il pas possible de consacrer une place aux peintres, sculpteurs et architectes bretons ? Une riche matière qui attirerait bien des sympathies et des collaborateurs. Notre terre est riche en sculpture et en architecture notamment. Je ne parle pas seulement du passé, mais aussi du présent. On construit partout en Bretagne. Pourquoi ne pas demander à des architectes, du moins à ceux que l'idée bretonne intéresse, de venir exposer, non seulement leurs idées, mais aussi des plans, et expliquer quelle architecture convient plus particulièrement à notre pays ?

Pourquoi aussi ne pas encourager une reprise de la sculpture ? Quelle place lui fait-on dans la construction actuelle ? Ne pourrait-on la stimuler.

Si des professionnels venaient exposer leurs conceptions à ce sujet, je crois que l'intérêt serait grand pour tous.

La peinture pourrait aussi solliciter l'attention du Bleun-Brug. Une exposition de toiles est-elle possible ? Ne pourrait-on faire appel aux peintres, et provoquer une ou des conférences sur les peintres Bretons, et même sur ceux qui, non Bretons, ont été inspirés par notre pays ?

Les poètes pourraient aussi être sollicités, avec récitation en breton et en français. Il n'en manque pas de poètes en Bretagne.

Et dans un domaine plus pratique, puisque nous devons être, l'an prochain, à Landivisiau, une causerie sur l'élevage du cheval en Bretagne, avec présentation de quelques spécimens de choix, serait de circonstance.

Et si vous le voulez, un concert de musique bretonne. Paris a parlé avec beaucoup de sympathie de notre dernier concert que votre gentillesse a permis de faire, et dont nous vous remercions...

Paul Le Flem.

ooo

Pardon Itron Varia Koatkeo

« Kelt ma vo Mari e Koatkeo
Ar Feiz e Skrignag chomo beo. »

Evel-se e skrivo an Aotrou Jegou, merzer kenta Koatkeo, evel-se e lavare an Aotrou Perrot, eil merzer Koatkeo.

Goude 150 vloaz a zismant hag a varo, emañ al lec'h santel oc'h advleunia kaeroc'h eget biskoaz, dre c'hras Doue ha nerz kalon an Ao. Perrot, en deus bet ad-avet ar chapel er bloaz 1937.

Abaoe, bep bloaz, ez eus bet eno, pardonioù kaer d'ar 15 a viz Eost.

Hini ar bloaz-mañ a c'hell beza laketa e-touez ar re gaer. Bennoz Doue d'an Aotrou Person ha d'e gure, o deus bet ar soñj vat da voda eno en deiz-se holl bro-sestonoù parrezioù ar c'hanton.

Emañ erru Koatkeo da veza pardon brasa Menez-Are. N'eo ket hepken diskibien an Ao. Perrot ha mignoned ar Bleun-Brug eo a ziredo di, met dreist-holl, karourien ha bugale ar Werc'hez Vari. Eun digoli kaer eo, evit Tad ar Bleun-Brug, gwelet o tont da wir ar menozioù a vage e doun e galon pa save en-dro chapel an Itron Varia.

ooo

Keleier Laouen

Ganet ez eus bet :

- Eur verc'hig, **Mari-Helena**, d'an Aotrou ha d'an Itron Jestin eus Keryann Gwinevez, d'an 23 a viz Ebrel 1954.
 - Eur verc'hig ivez, **Gwenn-Vari**, d'an Aotrou ha d'an Itron Yann ar Minor, sekretour ar Bleun-Brug, bet badezet e iliz-parrez Pont 'n Abad deiz pardon Itron-Varia Garmez d'ar 16 a viz Mezeven 1954.
 - Eur mab, **Hervé**, d'an Aotrou ha d'an Itron Jakez Ar Minor eus Pont 'n Abad, ha bet badezet d'ar 4 a viz Eost.
- Yec'het d'ar gerent ha bennoz Doue war ar vugaligoù.

Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan. — Tirage : 1.800 exemplaires.
QUIMPER, IMP. CORNOUAILLAISE. — C.P.P.P. N° 21697



ME 'ZO GANET E-KREIZ AR MOR

Me zo ga net e kreiz ar mor Ter leu ér
méz; Ur ti ig guen du hont em es, Er be nal
gresk e-tal en or Hag el lann e hol en an-
vez. Me zo ga- net e kreiz ar
mor E bro Ar- vor.

Me 'zo ganet e-kreiz ar mor
Teir leo er-mêz.
Eun tiig gwenn du-hont am eus.
Ar balan ' gresk e-tal an nor
Hag al lann c'holo an anvez.
Me 'zo ganet e-kreiz ar mor
E bro Arvor.

Ma zad a oa ' vel e dadou
Eur martolod.
Bebet en deus, kuz ha diglod.
Ar paour ne gan den e glodou.
Bemdez, bemnoz war ar mor blod,
Ma zad a oa ' vel e dadou,
Slejour rouedou.

Ma mamm ivez a laboura
Ha gwenn he bleo.
Ganti ar c'hwez war hon talou,
Desket am eus bihanik-tra,
Medi ha tenna avalou.
Ma mamm ivez a laboura
D'hounid bara.

Yann-Ber- Kalloc'h,
Sonerez gant Jef ar Penven.

Anvez : ar vro tro-dro — Klod : gloar — diglod : die'hloar — a laboura : a labour.